

CHANSON AN AMOUROUSTED

Chilaout, ma mignonnet,

Chanson an amourousted.

A zo gant eur c'hernevad vit an deio comaset

Amourouset zo eur guer

Hac a zo douc a tener

Caus he da vil nec'hamant hag ive da vil mizer

Pa vo an noz pe an de

Daou zen yaouank a goste

Quent ma c'houfeong doare he c'harivo gante.

Ar pot a goze brao

Hac ar plac'h a deuz foa.

Evit beza evurus na fot nemet eun dra

Amourouset a ra dhe

Dimezi hep dale.

Pa vouing neve eureget,

Vad a-ra d'he n'em velet.

Casi na ra met unan an ozac'h hag ar vreg.

Quen bras e ar garante

Ha quen bras an amitie

Neus an eil vit eguile hag en noz hag en de,

He ra deze lavaret

Pell zo cleyemp beza dimeet.

Tudou yaouanc, me ho ped,

Memes tra divoallet,

Liessoc'h zo dimezet vit a zo ezet

Gualet a meump a vejou

Cals a chanchamançhou,

Er menajou e caver bep sort ambarrassou,

Pa zeu en tieguezou

Cals deus a bouponou,



Unan a c'houlen erampoës
Hac eun all galetez.
Eun all zo en he gavel ho clasq donet er mez.

Ar vrez so dre an ti
Vel pa re e foudi.
Na neus den evit elevel reson vad ebet ganti.
Fachet e deus e fried
Adieu d'an amouroustet.

Tud yaouanc, mar em c'hredet,
Lacait eves, diouallet,
C'houi he an evurusen tud a so voar ar bed.

C'houi sa dre ar pardonniou
Ha dre an assambleou,
O tansal, o c'hebattal, o c'hevan taguennou,
Eun den yaouanc, mar gue fur
So parfet he blijadur.

Hac a re zo dimezet
An darn vuyan meus goelet
A vanque eun dra benag dalc'hmad do evurusted.

Darn so hac a laer ar yalc'h
An darn all e ya war varc'h.
Re alla gar ar chopin, quent azvont me wawalc'h.
Tud yaouanc, mar dimeet
Choaset tud fur a parfet.

PA HI LERER EN EUN EURED A HELLER AJOUTI

He neur dont da finissan
Souhaiti ferm a ran
Yec'het d'an daou zen neve, onanç ha prosperite.

Men o ped, camaradet,
Vit eur farç ne fachet ket;
Permettet e badinal en tre ar vignonnet,

Graç dimp da nem gavet c'hoas
Joaus evel biscoas
Ben an-den-ma pen eur bloa, ebars ar memes plaç
Ho trinka gant o goeren.
Da yec'het ar poupon.

LENEINDRE.

CHANSON

Ar Souben Les-Guin-Ardant

En eur gommanç canan, excus a e'houlennan
Digant kement hini a zo present aman,
A heurs euz oac'h yaouank, din a oa ordrenet
Rei dean souben les, nos kenta he euret

Mes en lec'h souben les, me rei d'ac'h da danvad
Malaga ha Champan, liqueurio dilicad
Biscoas ne oa evet sort gante bars ar vro
Me meus gret ho digaç express deus a Vordeaux

Na neus pring, na baron, na roue, nag empereur
A guemen ma nefet tanveet ma liqueur,
Pa zon deuet express evit ho regali
An tanva kenta a so d'ho pried a e' houi.

An eil tanva a zo d'an daou zen a henor
A neus ho conduit eus tol hon Redemptor,
An drede tanva nei so do mam ha do tad,
Pere a neus glac'har ho tonnet do couitad ;
D'ar bevaret a bedan breudeur a c'houarezet,
Kement hini ho car, querent ha mignonnet.

Ar pes so aman voar leerc'h a ve propr da ganan eus to^l
da euz eured

An devez a hirio, pebec contantamant,
Guelet an diou famill, ha kement so present
Aman nem assamblat gant cals a garante,
Diredet oll gant joa d'honor an dud neve.

Na gredant quet a ve den er gompagnunez
A guement a nefe nep sort tristediguez,
Gouscoude meus clewet alies lavaret ;
Er bed man na neus quet a vouir evurustet.

Bezan glac'harus vit eur vamm hag on tad
Pa wo-lont ho bugale ho to ned d'ho couitad ;
Magnet ho deus int bet gant tristidiguez,
Ha rei d'he ho c'honje dont do priedelez.

Breman daou zen yaouanc, c'houi vo obliget
Da zont d'ho c'honsoli queit ma vouin var ar bed.
C'houi a heus bet ive glac'har ha calounad
O tont da guimiad eus ho mam hag ho tad

Ho kalon so bet treuzet gant ar glac'har
Ho laret kenavo ha do preur a do c'hoar
Bemde oac'h assambles neun union barfet,
Hag en nos hag en de, c'houi so en em garet

Gant ho polonte vad e zoc'h nem separet,
Ha cetu c'houi breman unisset d'eur pried,
Kenavo tad ha mam, breudeur a c'hoarezet,
Me ha ya da zel'hel menaj gant ma fried

Ar briedeles he kaera tra so er bed,
Gant Doue he unan e bet etablisset,
Pa oa krouet Adam gant Krouer ar bed man,
E neus roet Eva evit pried dezan

Rag se daou den yaouank kemeret confians,
Ha Doue a rei d'ac'h prosperite ha chang,
Ha nem garet bepret gant guir fidelite,
Savet ho pugale en carante Doue,
Ha pa zeui ar maro do separi ho taou,
Grag d'ac'h da nem gavet assambles en envou.

LENEINDRE.

(*Propriété de l'éditeur*)